



**KANNAD KREIZENNOU SEVENADUREL BREIZH**

(Bulletin de Liaison des Centres Culturels Bretons)

MENSUEL

BILINGUE



## NOUVELLE ORGANISATION

===== Ainsi que le laissait prévoir nos derniers bulletins, "ME A ZALC'HO" désire élargir son champ d'action.

Ce numéro, qui marque son troisième anniversaire, s'adresse non plus seulement aux Cercles Celtiques, mais aux divers CENTRES d'ACTION CULTURELLE BRETONNE, ainsi que le mentionne désormais son titre.

"ME A ZALC'HO" doit devenir ainsi le bulletin de liaison, l'organe de travail de toutes les bonnes volontés désireuses de prendre une part réelle et active à la défense et à l'enrichissement du patrimoine culturel qui nous est propre, autour d'un programme et d'une action élaborée et organisée en commun.

Il continuera à être bilingue, mais cependant le breton y aura toujours la place la plus importante, la langue étant la base même, l'instrument sans lequel il ne peut être question de culture.

Toutefois il semble sage de ne pas restreindre nos possibilités et d'écarter les bonnes volontés. C'est pourquoi, tenant compte des réalités actuelles, des articles en français figureront dans nos pages, permettant à ceux qui n'ont pas encore une connaissance suffisante du breton de savoir dans quel sens s'orientent les efforts et d'y prendre leur part, dans toute la mesure possible.

Sans que cela puisse signifier une exclusion quelconque, l'action envisagée avec "ME A ZALC'HO" nouvelle formule ~~peut~~ prend appui:

d'une part- sur les CERCLES CELTIQUES, comme par le passé, ceux-ci conservant toujours leur complète indépendance et la faculté de se grouper autour de leur Fédération (actuellement en cours de remaniement) pour l'organisation pratique de leurs activités : fêtes, relations intercircles; organisation de déplacements; achats, costumes etc.....

"ME A ZALC'HO" se propose de leur fournir des programmes d'études sur les différentes matières auxquelles se rapportent leurs activités, et de reprendre pour cela l'idée des "CAHIERS d'ETUDES". Ils sont élaborés et actuellement entre les mains de spécialistes des questions pédagogiques pour dernière mise au point avant publication.

Nous savons, par ailleurs que plusieurs Cercles ont adopté le principe de ne recevoir de nouveaux membres que lorsque les candidats auront satisfait à l'épreuve d'un examen portant sur un minimum de connaissances de la Bretagne et de sa culture. Les candidats seraient admis à fréquenter le Cercle pendant une période de stage de 3 mois, qui leur permettrait d'acquérir les connaissances qui leur feraient défaut, pour être à même de passer cet examen. Un programme-questionnaire répondant à cette idée sera publié dans notre prochain numéro et les Cercles intéressés pourront en tirer parti.

.....

Toujours dans l'esprit d'une large entente et d'une répartition des efforts, rendus ainsi plus efficaces, nous sommes en contact avec divers organismes existants et dans ces programmes d'activité et d'études, nous inviterons les Cercles à s'en référer à eux pour les points où dont il s'occupent plus particulièrement.

II.- d'autre part : l'EMSAV KELTIEK BREIZH dont les buts rappelés plus loin sont de promouvoir l'action partout où existent des centres culturels, et d'en suivre les progrès.

Son organisation prévoit des correspondants locaux et cantonaux qui peuvent être en même temps, cela va de soi, dirigeant de Cercles Celtiques, ou quelquefois simple membre, le cas échéant.

Une part très importante sera réservée dans "ME A ZALC'HO" aux communiqués, comptes-rendus etc. de l'E.K.B. lesquels seront uniquement en langue bretonne puisque l'E.K.B. est le noyau, le ferment groupant tous ceux qui entendent prendre pour base essentielle de toute culture, pour les Bretons : leur langue.

III.- Enfin, "ME A EALC'HO" se place sous le parrainage du COLLEGE DES BARDES, DRUIDES ET OVATES de BRETAGNE - SKOL VEUR BARZHED DROUZHED HAG OVEDED BREIZH VIHANG.

Cette institution qui, en Bretagne a déjà 50 ans d'existence, est de plus une filiale du GORSEDD traditionnel du Pays de Galles. Elle est ainsi tout indiquée pour entretenir et développer les liens qui unissent la Bretagne aux autres pays celtiques, en particulier ceux de la branche "brittonique" : Pays de Galles et Cornouailles.

Le POUENGOR - autrement dit "Comité de direction" du Collège des Bardes groupe désormais un certain nombre d'éléments de formation "Cercles Celtiques" et se trouvent ainsi mieux à même de s'intéresser au mouvement de renouveau culturel qui est leur oeuvre (en même temps que B.A.S. qui est aussi, en fait, un dérivé des Cercles Celtiques) dans toute la Bretagne et au-delà.

Pour sanctionner, rendre tangibles et célébrer comme cela se doit, les réussites, les créations artistiques, littéraires qui doivent fleurir de cette action, qui seraient mieux désignées que les membres d'un Collège de Bardes qui représentent traditionnellement les formes les plus anciennes de l'enseignement et de la culture en Celtie. Etre appelé à entrer dans ce collège est un honneur réservé - suivant en cela l'exemple de notre soeur galloise - aux meilleurs..

La troisième partie de notre bulletin sera donc consacré aux avis et communications, études etc. des membres du Collège des Bardes, indépendamment des circulaires que le Pouellgor pourrait avoir à établir dans des cas particuliers.

. . . . .

Rappelons encore, enfin, que le mot d'ordre de "ME A ZALC'HO" est et demeure : UNIR, que nous nous efforcerons de découvrir tout ce qui suit cet idéal, pour mieux CONSTRUIRE, laissant systématiquement et résolument de côté toute vaine polémique.

Au point de vue organisation pratique : rédaction, administration et surtout : trésorerie, nous avouons bien simplement n'être pas encore absolument au point, comptant sur les réactions qu'amèneront ce premier numéro, les remarques, critiques et conseils que nous sollicitons instamment de nos lecteurs, pour orienter nos efforts et prendre telle ou telle position.

C'est ainsi, par exemple, qu'en ce qui concerne les cotisations-abonnements, si nous ne réclamons aucun supplément pour les 3 mois qui termineront cette année 1949, un système est-il à l'étude pour 1950 qui ferait jouer une participation plus substantielle de tous les membres des associations intéressées, permettant une aide réelle et combien nécessaire.... à nos publications de fond : "AL LIAMM" et "ME A ZALC'HO" qui en deviendrait le supplément traitant de toutes questions pratiques, tandis que la revue littéraire resterait "AL LIAMM".

Il s'agit dorénavant, à une heure qui est véritablement critique pour l'avenir de la langue bretonne, de former un faisceau d'efforts solidaires, d'entrevoir, pour chacun . . . de ceux qui sont inscrits comme membre d'un CERCLE CELTIQUE, de l'E.K.B. et du COLLEGE des BARDES, d'entrevoir les sacrifices nécessaires dans ce but. Et c'est bien évidemment en tout premier lieu dans le maintien de nos publications en langue bretonne que doivent se concrétiser ces efforts, avec comme corrélaire : la diffusion de nos livres en breton (B.A.L.P) et le programme d'action que s'est tracé l'UNION POUR LA DEFENSE DE LA LANGUE BRETONNE" dans le but d'obtenir l'enseignement du breton dans les écoles.

"ME A ZALC'HO"

- - - - -

Adresser la correspondance à : Monsieur A. LATIMIER

24, Rue Edmond Nocard

SAINT MAURICE (Seine)

-----

## PEZHIOU-C'HOARI GIZ NEVEZ

Pezhioù-c'hoari evit an holl, zoken evit ar re na ouzont ket brezhoneg, hag e brezhoneg koulkoude...

Ha bet oc'h a-wechoù o welout ur film en ur yezh estren, en ur yezh dianav ? A dra sur, n'hoc'h eus ket komprenet penn-da-benn. Met marteze, dre vras, oc'h bet gouest da heuliañ an istor, netra nemet gant ar skeudennoù.

E kêr Dulenn, en Iwerzhon, eo bet lakaet an dra-se da dalvezout evit brudañ yezh ar vro. Er gêr-se, enni ouzhpenn 500.000 a dud, ez eus nebeut anezho o c'houzout mat an iwerzhoneg, un 3.000 bennak, marteze. Kalzig a dud, avat, o deus desket ar yezh er skol, a c'hell lenn ur skrid savet enni, gant na vo ket re ziaes, hag a c'hell kompren hep re a boan, pa vez komzet dirazo.

Setu amañ eta ar menoz a zo deuet e penn paotred<sup>o</sup> zo : aozañ pezhioù-c'hoari, en iwerzhoneg eeun, en doare ma vint heuliet aes, zoken gant ar re n'int ket ampart war ar yezh. Ar pezhioù-c'hoari-se a gaver enno kement tra a blij d'an holl : kanaouennoù, dansoù, muzik, troioù, farsus, gwiskamantoù kaer, hag all, hag all.

Bep goañv, da skouer, e vez c'hoariet unan eus ar pezhioù-se anvet "pantomimoù". Kement a dud a zeu da welout ma c'hell bezañ displeget bemnoz e-pad tri miz, ha leun ar sal atav.

En ur gêr evel Paris pe Naoned e vefe tu, a gredan, da ober heñvel. Seurt pezhioù-c'hoari, goude holl, n'int ket disheñvel-tre diouzh darn eus hor "misterioù" kozh, - sonjit en taol micher-se, ken ankounac'haet hiziv "Loeiz Eunius"-.

N'eo ket uhel-uhel ar c'hoariva-se, me'oar. Met ur bobl a rank kaout pezhioù-c'hoari izel koulz hag uhel, evel ma rank kaout levrioù izel koulz hag uhel. Kentañ reolenn ar c'hoariva eo kaout buhez. Ha penaos e c'hell ur pezh-c'hoari kaout buhez ma ne vez ket c'hoariet, ha c'hoariet dirak ur bern tud ?

Ouzhpenn se, tu a vefe gant seurt pezhioù da c'hounit, pe da vianañ da chom hep koll, arc'hant. Ha va c'hredit, pa vo gounezet arc'hant gant ar brezhoneg, e vo hor yezh en he flom.

ROPARZ HEMON

HENTEL GOUELIOU AN HANV- Tu a oa bet, warlene, warlec'h  
gouel bras Kemper, d'ober ur sell-tro war an doareoù implijet  
enni, ha tennañ ac'hane meurañli talvoudus.

Ar bloaz-mañ ledanoc'h a dle bezañ an dro-sell, ha donoc'h  
ar c'hentel da dennañ peogwir ez eus bet da nebeutañ **THI** gouel  
bras : **KEMPER**-adarre- **KERAEZ** ha **BLEUN BRUG LOKRONAN**.

Ma seller ouzh ar c'hempennadur, bez'e c'heller lavarout  
ez a war wellaat. Dalvezet o deus an alioù bet roet goude  
Kemper warlene, evit meur a dra.

Pezh a zo da sellout, kentoc'h, evit ar mare, avat, eo  
ar **SPERED** a oa strewet war an abadennoù-se, ha pezh a zanvez  
**SEVENADUREL BEV** a oa enne, peseurt mad evit adsav Breizh a zeu  
war o lorc'h ?

Ar spered ? Mat a dra sur; arouez ar "garantez-bro warnañ.  
Pep hini o santout e vare pe vare, epad ar gouelioù-se, ez eo  
**BREIZH**...un dra bennak... ha Breizhiz tud hag o deus un temz-  
spered, doareoù, dezho o unan; troet m'az int war pezh a zo  
liv ar gened gantañ. Lorc'h ha from e kalonoù an holl, tost  
da vat, o welout penaos e c'heller sevel etrezomp, seurt  
gouelioù kaer, tolpadegoù ken niverus, ken meurdeus.

Hogen, ha da c'houde ? Gwechaechu ar gouel ? Petra a  
chom e spered an darnvuiañ eus an dud ? Pe seurt sonj a chom  
da droiata en o spered da laka anezho da vont un tamm pelloc'h  
 eget plijadur an daoulagad, evit pezh a sell buhez spered,  
sevenadur ar Vro ? Nebeut a dra. En em lakaat a raer da ren  
ar vuhez pemdeiz; da bledin gant ar prederioù boutin; da  
glask war ar c'helaouennoù ur magadur distreset, boued d'an  
nec'h, d'an dizunaniezh, d'ar c'hwervoni. Dont a raer da  
vezañ adarre "paour kaezh tud" brewet dindan lezennoù sod, o  
klask gounit un tamm arc'hant a ya diganeoc'h n'ouzer ket  
dre penaos....Nijet eo pell, ha buan, pezh an doa lakeet  
trid en hon spered hag evel ur sklerijenn lugernus, ur banne  
aer glan ha nerzhus da barañ warnomp da vare gouelioù breizhek  
an hanv..

Siwazh, evelse emañ an traoù gant kalz re ac'hanomp..

Rete veze d'ur rummad, da vianañ, ober dishenvel.  
Da dud ar c'hele'hioù, da skouer. Int eo a dle dere'nel bev  
atav, en dro dezho, e pep lec'h buhez speredel Breizh ; dezho  
eo da stagañ arouez Breizh war kement tra ma reont : labour  
pemdeiz, kenwerzh, kenkoulis ha darempredoù etre kerent ha migno-  
ned; kement ha gant ar c'hoarioù : dansal ha kanañ.

Ha dre penaos e teuont a-benn ? En niverenn a zeu,  
ma fell deoc'h, dre rein da anaout deoc'h doareoù rakaozet  
aratoz, e vezo lavaret kement-se deoc'h.  
(da heul)...

# ENSAY Keltiek Breizh

K R O G O M P E R B A L  
= = = = =

E.K.B. a zo chomet berr alies. Aes gouzout perak. N'eus ket bet kalz a dud o rein o anv deomp. "Da betra reiñ ur skodenn o'hoazh?" - "Re a strolladoù a zo" - setu pezh o devo sonjet kalz a genvroiz.

Treuzkomprenet omp bet. Ne fell ket deomp mestroniañ tud, bezañ e penn an-dra-mân-dra evel darn... Sellit outo : strolladoù forzh pegement gant ar Vreizhiz; kelaouennoùigoù dezho (pep hini e hini, evel just, pe dost). Skignet, dastroc'het, emglev ebet etrezo ; strivoù en aner, kaset endro a stia-bez, gant kalon, peurliesañ, koulskoude. Setu ar re a garfe labourat, ober tra pe dra. Heñveloc'h omp ouzh buzug troc'het e tannoù hag an tannoù-se o fichal, eget ouzh tud, ganto ur penn yen hag ur galon domm oc'h unaniñ o strivoù evit Breizh.

Setu perak eo ret adsevel Ensavadur Breizh, kenstrol-lañ al labour graet e pep korn, war bep tachenn. N'eus striv didalvoudus ebet, ma vez liammet ouzh strivoù all. Anez n'eo nemet koll amzer ha koll nerzh.

Adarre eta, o spisaat ar pezh a vennomp ober gant E.K.B. setu hor mennad : liammañ an holl Vretoned a ra tra pe dra, e ne vern pe strollad, war ne vern pe dachenn; goulenn outo bezañ kenskriverien E.K.B. Labour a zo ganeomp da loden-niñ. GOUNIT hon eus ezhomm. An hent eeun a zo da gemer : implij an holl nerzhioù a-du gant dasore'hidigezh BREIZH, e sell ober anezhi adarre, ur vro geltiek. Danvez hon eus a-builh; eosterien hon eus . Dizeriañ a reont, avat, pa vezont lezet da gludañ en o c'horn, ha koll kalon. Mar domp gouest da lavarout dezho : "C'hwi a gar labourat war an dachenn-mañ-dachenn ? Mat! N'oc'h ket hoc'h unan. Hemañ, hennezh, henhont a ra eveldoe'h. Ho tammig labour lakaet gant o re-i a zo talvoudus; ya, ma vez unan bennak da henchañ; unan gouest, peogwir e oar pezh a vez graet e pep korn ar vro (dre al lizheroù kaset dezhañ gant ar genskriverien) E.K.B. n'eo ken tra : an ere, al liamm etre an oberourien kar-o-bro.

Ar skodenn roet betek-hen gant izili an E.K.B. a dalvezas da baeañ timbroù al lizheroù, niverus, a zo bet kaset hini hag hini. Ret eo, adalek bremañ labourat en un doare all.

Ur gelaouenn oberintiz a vazo digoustusoc'h, hag a skigno kenkoulz na dre lizheroù prevez, gwelloc'h, zoken, ar c'heleier kalonekaus, ar c'hinnigoù resis hoc'h eus ho tibab da ober enno evit kas labour pe labour betek penn.

Hiviziken, holl genlabourerien EMSAV Keltiek Breizh e vezo kaset dezho "ME A ZALC'HO" a zeu da vezañ adalek bremañ, kannad AR HE A RA.

Ouzhpenn-se o devo, a vare da vare, kelc'hlizheroù da heñchañ o labour. "ME A ZALC'HO" ne vo ket ur gelaouenn da vezañ lennet gourvezet en ur gador-vrec'h, en ur sachañ war ur c'hornad batun. Kerkent ha lennet, d'al lennerien da gregiñ en o fluenn, da sevel notennoù evit aozañ o labour, evit dastum danvez o respontoù d'ar goulennoù, d'an enklaskoù; da gemer, laouen, lod el labour evit Breizh. (ledan eo an dachenni!)

Un torfed eo lezel kenvroiz zo-atav an hevelep re, o pleal, hag i hepken, gant al labour-se, ha dezho ivez, "bugale da vagañ" "tiegezh da sevel" "nebeut a amzer vak". ha me oa pe zigarez all a vez kavet,...

D'ar re n'int ket deuet ganeomp c'hoazh -re niverus int-siwazh- kompron o dlead. "Ya dont a ran davedoc'h; ya, me a raio va lodig; ya me a ro deoc'h va anv diouzhtu." Breizh ne c'hell ket gortoz. Skoazell ar Geited all a zo gounezet bremañ. Arabat, emichans, en em ziskouez dezho evel tud wan, mat da glemm atav, ha ne tra ken.. Hor skorañ a vennont, ya, nemet hon dachenn a zo BREIZH, he yezh nag he sevenadur; n'eo tachenn bro all ebet.

KERLANN.

## H O L L A B O U R-

Abaoe 40 bloaz ar Vretoned o deus goulennet digant ar Stad ma vefe kenteliet o yezh er skolioù. Ar gundenn n'eo ket di skoulmet c'hoazh, ha ne seblant ket war nezh bezañ nag ar bloaz a zeu nag ar bloaz warlerc'h.

Ne reomp ket fae war striv hor c'henvroiz a gendalc'h da grediñ e vo roet un deiz bennak kentelioù o brezhoneg er skolioù ar stad. Ne labouront ket en aner. "Ar Brezhoneg er Skol" araok ar brezel, "Unvaniezh Difennourien ar Brezhoneg", bremañ, a ziskouez splann dirak ar bed holl bolontez Breizh a-bezh da vezañ kenteliet en he yezh.

Ul labour all hon eus, ni, da sevenin :kenderc'hel gant al labour graet gant Ensavadur Breizh hag ar Framm Keltiek.

Ar roll-labour a ginnigomp deoc'h n'eo ket koustus, rak paour omp. N' vern. N'hon eus ket ezhomm a galz a arc'hant evit seveniñ hor mennad. Kavout tud pennek a fell dezho labourat ano gmañ an dalo'h. Fellout a ra deomp lakaat un den a fiziñs e penn pep kanton. Fiziet e vo c'nnañ aozadur ar stourm en e gorn.

Ur c'hannad, An Ao. BRIZ a yelo a vare da vare da veladenniñ ar pennoù kanton a-berzh F.K.B.

Un dlead eo evit pep ezel skoazellañ ar pennoù kanton. N'hon eus ket amzer da goll gant tud lezhirek a galz dezho o deus graet kalz evit Breizh p'o deus lennet tra pe dra.

Ret eo da bep hini kemer perzh el labour evit ar yezh. Kadenn ar re-~~re~~skrivadur n'hall bezañ gwech ebet un harz da gas ar striv da benn. F.L.T.G., K.L.T. a vo degemeret ingal ganomp...

Ha dreist-holl kle vit mat : Labourioù a seblant bezañ dister d'ar marc a zo talvoudus kenañ pa'z eo bodet labourioù an holl.

E gwirionez n'eus netra dister evit ar brezhoneg.

- E. TYMEN -

---:---:---

HA GOUZOUT A RIT?.....

=====

F 1949, bez 'ez eus bet skol vrezhonek :

- e skolaj an Oriant;
- e skol Kristen Treboul : 76 diskibl;
- e skolaj St-Salver, Redon : 30 diskibl;
- e skolaj Poñdi;
- e skolaj Kemper : 30 diskibl;
- e kele'h Brezhon Naoned : 9 diskibl;

net eo ez eus bet kentelioù Brezhoneg e kalz a leo'hioù all. Siwazh n'eo ket bet kemennet deomp gant hon izili...  
Pezh a ziskouez pegen talvoudus e vije respont d'hon-enklaskoù!...

Kantadoù a vugale eta o deus heuliet ur skol vrezhonek. N'eo ket awalc'h, digorit skolioù nevez!-

...../...

EVIT PR. NAÑ LEVRIOU....HAG EVIT O GWERZHAÑ....

Breuriezh Al Levrioù Brezhonek (B.A.L.B.)  
8, Rue Legerverand - Rennes  
C.C.P. - 1.171.35 Rennes.

Adalek bremañ B.A.L.B. na verzho ket levrioù ken. An izili  
o doa asantet da verzhañ levrioù evidomp a zo pedet, ma fell dezho  
kendero'hel, skrivañ da : B.A.L.B.

Ha lavaret e vez n'eus ket tu da verzhañ levrioù Brezho-  
nek e Breizh-Izel?... Klavit 'ta :

"Povar Stourmer, dilezet ganto o ziegezh o deus en em  
roet a zevri d'al labour-gwerzhañ, a di da di. Brasoc'h eo bet ar  
berzh o deus graet eget n'hon dije kredet ni hon unan : évit  
ouzhpenn 255.000 lur a levrioù brezhonek o deus gwerzhet e korf  
tri miz". -

(Kannadig B.A.L.B., N°2)

+

+ +

An Ao. . BRIZ, kannad F.K.B. a dremeno un deiz-bennak  
en ho korn. Ho pediñ a reomp da ober dezhañ un degemer hegarat.

--:--!-

Ar C'hondalo'h Keltiek a zo bet dalo'het e Bangor  
(Kembre) etre an 8 hag ar 14 a viz Eost. An Itr. GALBRUN hag an  
Ao. E. TYMEN a oa kannaded F.K.B. eno.

Roparz HEMON en deus displeget dirak ar c'hondalo'h  
kudenn ar skrivagnerien hag an Embannerzh e Breizh. E buzegenn  
a zo bet troet e Kembraeg gant An Ao. MOAER.

--:--!-

An dud a vijo laouen da zegemerout bugale a Vro Gembre  
e-pad vakañsoù Pask a ztu, pe e-pad ar vakañsoù bras, a zo pedet  
da skrivañ diouzhtu da : E. TYMEN - 50 Rue de la Résistance,  
Quincy-sous-Sénart (S.-et-O.) - en ur verkañ pe baotr pe blac'h,  
ha war-dre pe oad.

--:--!-

...../.....

I5 BREIZHAD YAOUANK (pao tred ha merc'heñ) pedot gant Urdd Gobaiith Cymru a zo bet degemeret e kamp an "Urdd" e Llangranog dre Llandissul (Kembre), Adalek ar 26 a viz east betek sul ll a viz gwengolo. Eus an I2 d'ar I7 a wengolo bet int e tiez prevez, degemeret gant hor c'hendervi tramor, e - tro Llanelli. Trugarez a greiz kalon dezho.

----- Kaset a zo bet keloù deomp, eus Naoned, diwar-benn krouidigezh ERGERZH BREIZH KELTIA HAG HOLLVEDEL (?) Evit blenianñ ha rakkempenn ar beajoù tramor, heg en holl vroioù zoken, ez eo graet. Bruderezh a ra ivez, evit Breizh en estrenvro. (Chomlec'h : 55, Bois-Herce NAONED).

----- Trugarez d'"AL LIAMM" "KROAZ BREIZ" "ME A ZALC'HO" "KAIROU KRISTEN" o deus respontet da enklask E.K.B. - Digant "SKED" - ha "STIVELLOU BREC'HELLEAN" e vefemp laouen kaout keloù ivez.

----- Trugarez ivez d'an holl dud o deus kaset da E.K.B. kelaouennoù ha troc'hadennoù-kelaouennoù o sellout ouzh Breizh hag an ensav. Prizius eo kement-se evit an dielloù e vez miret ganimp hag ivez gant tud-zo troet gant danvez Breizh. Ra gendalc'ho hol lennerien da gas pennadoù embannet, evelse, dimp.

----- Unan harluet (ur C'hastellad) a zo bet oc'h ober un dro e Bro Dreger hag e skrive dimp : "Bez 'ez on bet e Breizh, gwir eo. E Breizh ? Ret e oa din dere'hel sonj m'edon e Breizh ken beuzet ma oa er "gallastrouhez".

"E Trebeurden ar baour-kaezh Bretoned a zo kollet. Amañ hag ahont e vez kavet unan yaouank a oar brezhoneg ha n'eo ket mezhus d'hen ansav, pe c'hoazh ret eo mont war ar maez; elec'n ma vez kavet "triburioù drol"...evel ma lavar ar re a zo "eus an aodoù "touristik".

"War ar maez an dud a zo start-kenañ, zoken a-wedhoù tud an oad. Pa oamp e pardon I.V. ar Sklaerded ez eo bet lavaret deomp-ni kenderc'hel p'edomp o kanañ e brezhoneg, ha kement-se gant tud ar bobl.

"Ar pezh a zo, ar merc'ned eo-ker "plouk" eo komz brezhoneg...- c'hwi her goar... ha setu pao trezed yaouank e dilhadoù gouel evit dougen ar Werc'hez, hag a vez klevet o kaozeal galleg, mar plij, gant un "accent"...va Doue! ma en em glev-jent e vije cheñchet kalz a draoù, me hel lavar deoc'h..

----- Ur skritell e brezhoneg (rann-yezh Gwened) e vez kavet war ar mogerioù, er parrezioù tro-dro da ALRE :

"BREZEL d'ER LAMBIG"-

Er lambig e gas geton a bep sond klanvedeu

Tabut en tiegeheu, peurlante ée familheu-

"GET EN ALKOOL UR VRO E IA DE GOLL

(sellout al

lizher- pelloc'h-)

## D'AL LABOUR EVIT BREIZH -

Eus Plouneour-Traezh (Leon) Paotr Treoure en deus kaset deomp kanaouennoù hag ur gontadenn a vo mat evit "Ar Gwennili", levr er C'hannadig-parrez. Trugarez dezhañ.

Erwan Kraff eus Skaer, bremañ e Gwervenan, Plougonven en deus kaset deomp ur studiadenn war an derc'hel kontoù e brezhoneg. Implij mat a vo graet anezhañ.

Marc'harid Gourlaouen, eus Douarnenez a gasas deomp un danevell diwar-benn ar Bleun-Brug e Lok Ronan (da gaso keloù eus he skol!)

Loeiz ar Floc'h, Sant Brieg, a gendalc'h gant troidigezh an Testamant Nevez, echu ar Pevar Aviel pell'zo. Troidigezh ar Brevial e vez ouzh he feurechuiñ peure'hraet eo ar psalmoù. Al levr oferenn emañ krog mat gantañ. Er goañv 1948-1949 eo bet reizhet an hanter eus Isahia. Ouzhpenn-se, "pennadoù e-leizh a istribilh"

E Gwengamp, an dimezell St Gall de Pons (Benead) a bleustr war ar relijion hag ar brezhoneg war an dro, o vont d'ar bobl hag o lezel mouladurioù brezhonek e pep ti.

E Brest, Mona Martin a ro kentelioù brezhoneg en he zi, Levr di Derrien, adsavet, a werzh levrioù brezhonek.

E Roazhon, Xavier Langleiz a ra war-dro BALB. "Enez ar Rod" ha levrioù all lakaet dirak-daoulagadoù an dud a zo bet gwerzhet. Ur prof arc'hant en deus bet digent Ker Roazhon evit kamp ar Vrezhonegerien.

Merser, skolaer e-tal Kadvan (Caen) a ra war-dro ar C'helc'h er gêr-se.

An Aotrou Troadeg, Kemperle, a zo mouzet ouzh ar "zedacheg". (N'eo ket un digarez evit chom hep ober netra evit hor yezh)

Per ar Meur, Lanmerin (Tregar) en deus bet gwerzhet skeudennoù (Sant Erwan, hag all), ha levrioù brezhonek evit BALB.

Eus ar Roc'hell, Pradig (Praud) en deus kaset deomp ur bern danvez moulan : kontadennoù, pennadoù, gerioù-kroaz a zo bet kaset da "Groaz Breizh". Gouel Sz Anna e kêr ar Roc'hell a zo bet lidet hep tamm galleg ebet. An Aotrou Person, AR GALL, en deus kinniget e iliz d'ar Vretoned.

Loeiz Kotonneg, skolaer e Neo (Nevez) Kernev, a ra war-dro Kelc'h Keltiek Nevez a labour a du gant ar skollik. Ur C'helc'h Keltiek all a zo er barrez "Ar Gwennili" kaset en-dro gant ar veleien. Kevezerezh a zo.

Lili Morvezen e Konk-Kernev a ra war-dro ar C'helc'h er gêr-se. Kalz a vad a ra dreist-holl pa vez graet emañ gant ar brezhoneg

E Pariz, Tymen hag an Itron Galbrun o deus komzet er Radio (Paris-Inter) diwar-benn Kendalc'h Keltiek Bangor, hag an etre-keltiegezh. Se a oa d'ar sul a viz Gwengolo da 13<sup>e</sup> 30. Pedet eo bet an Itron Galbrun da lavarout un nebeut komzoù e brezhoneg d'hor c'henvroiz.

An Aotrou Galbrun en deus kemeret ur film e Breizh an hini-mañ (ar gouelioù). Luc'hvannet e vo dizale.

## UR SKOUER

Kanton ag an Alre

Danevell skrid Miz Eost 1949

Ar c'henskriver : Kidna

"A bep tu e sav ar c'hlemm "Ne vez graet netra", "Gwelloc'h e vije lavarout "Ne reomp ni netra, ne ran me netra"

Fromet gant ar c'homzoù se a zo re wir siwazh, mennet em boe e deroù ar bloaz ober muioc'h eget ar pezh em boe graet betek neuze. Skrivet em boe dit pezh ar c'hoantaen ober. Sevenaet em eus va c'hoant.

### I - Digoradur ur skol vrezhoneg en Alre

Na souezhusat un darvoud ! Biskoazh ne oe bet gwelet ur skol seurd se er barrez.

Da gentan, goulennet em eus digant ar Maer prestañ din ar sal ma veze graet enni an holl dolpadegoù. Asantet en deus he reiñ din div wech ar sizhun, evit netra.

D'an eil, kemennet em eus an doare gant harp an teir gazetenn embannet er Morbihan. A-benn ar fin an amenuzer en deus graet evidon un daolenn du bihan livet ganin. Prest an traoù digoret eo bet ar "skol 3 miz" e Miz c'hwevrer ; padet he deus pevar miz hanter betek an ehan-skol.

Ar skolidi - C'hwec'h e oant, div verc'h en o zouez. Tud a bep seurt micher, hag a bep liv politikel. Darn anezhe, siwazh, a veze dalc'het gant o labour alies awalc'h. An div verc'h neoazh o deus heuliet ar c'hentelioù penn-da-benn. Unan a oe kelennourez war ar saozneg, eben a oe daktilo (ha paour he zud).

An hini gentañ a c'houie un tammig Brezhoneg, ganet na oa e Gourenez Ruiz, an eil ne c'houie ket ; he zad avat e c'houie. E dibenn ar skol, gouest e oent da lenn skridoù e Brezhoneg eeun. Ar skolaerez zoken a save pennadoù hep re a fazioù.

Evit echuiñ - Ne vez ket bet enebet ouzhin tamm ebet koulskoude n'em eus ket bet kalz a skolidi (e-touez va hanter-zougenad bez a oe 2 Vreizh-Uhelad a Vro Naoned, hag an Alre a zo ur gêrig a 7.000 a dud)

Neptu a oe va skol. Marteze ma vehe bet graet ar c'hentelioù e skol ar frered gant ur beleg, pe e skol lik gant ur skolaer, muioc'h arvarzh he devehe graet.

Sellomp ouzh an dra bouezus se, evelkent : Va skolidi a zo bet dedennet gant ar garantez evit ar Brezhoneg, hag evit se hepken. Strollad ebet n'en deus pouezet warnezhe. Ha gwelloc'h evelse.

Ma vehe bet krouet ur skol evel hon hini e pep kanton a Vreizh-Izel ? Kontit ar c'hantonioù, ha bremañ kontit niver ar skolidi.

## II - Ar skritelloù - "Lakaomp Brezhoneg dindan daoulagad an dud"

Setu perak eo bet moulet 150 skritell a-enep an alkool (Gouzout a rit ar reuz graet gant al lambig e Bro-Wened)

Betek hen 22 anezhe a zo bet peget e 9 bourk. Al labour a gendalc'ho e Miz Gwengolo pa vo an dorfetourion o strilhañ o ampoezon.

## III - Ar prestañ levrioù

N'em eus prestet nemet "Tud brudet..." rak ne c'hellan ket kavout ar re all.

D'ober hon eus a levrioù skrivet en ur yezh eeun. Moulet levrioù poblel a gant pajenn d'ar muiañ ha neket levrioù evel "Arzhur a Vreizh" kaer ha... kazi didalvez.

## IV - Al labourioù arall

3 fichenn savet ganin. Nebeut a dalvoudegezh a gavan enne.

Darempredoù etre ar Vrezhonegerion a Vro Wened evit tostaat skritur Gwened ouzh hini K L T.

Ganeoc'h a galon : KIDNA

# SKOL VEUR DROUIZED BARZHED HAG OVEDED BREIZH-JZEL

Evit en deirvet gwech abaoe dibenn ar brezel, setu m'az eo en em vodet adarre izili Skol Veur Drouized, Barzhed hag Oveded Breizh-Vihan. En NAONED -evel daou vloaz a zo- ez eo bet dalc'het ar GORSEDD : divizoù etre izili ar Pouellgor, ha bodadennoù evit an holl.

Kenurzhiat e oa bet an traoù gant an Arouez-Varzh ; Eostig Sarzhaw, peogwir an Drouiz Meur Taldir a oa, evit ar poent, e Bro-Kembre, pedet gant hor breudeur Tra-Mor da vont d'o weladennin, goude un toullad bloavezhioù ma ne oa ket degouezher gantñ mont.

Ar vodadennoù a oa da vezañ en ur sal eus Kastell an Duked. Siouazh : a-boan m'az eo bev a-nevez hor Strollad m'he deus dija enebourien... Fall-levezon unan bennak (ha ne fell ket dimp menegin ec'h anv, rak evidomp-ni eo ar PEOC'H a glaskomp, na n'eo ket ar REUZ)-a reas da Vaer Naoned nac'h ouzimp ober hon bodadegoù evel ma oa bet divizet, en ur sal er C'hastell. Un dismegans a bouez-ha diabeg- eo kement-se, e keñver ur strollad kozh a Vreizh hag hi skour ur Strollad kosoc'h c'hoazh:hini Barzhed Kembre. Spi hon eus e vo koulskoude kompezet an traoù hep na savo re a ziaesterioù evit ar re, dallet gant n'ouzer ket pebezh kasoni ha c'hwervoni, o deus klasket c'hoari un taol fall dimp.

En abeg da se, koulskoude, ez eo bet un tammig diskempennet roll ha lec'h ar vodadegoù ha nebentoc'h a dud a zo en em gavet e darn anezho, pe ne oa ket bet amzer da rein da anaout d'an holl penaos e oa renket an traoù da diwezhañ.

Daoust d'an diaesterioù-se, bez e c'hellomp lavarout eo bet GORSEDD NAONED 1949, ur GORSEDD MAT. Peza dalv ar muian e seurt tolpadennoù n'eo ket hepken ar blijadur d'en em gavout mignoned a-gevret ha da varvailhat war bep seurt traoù, nogen an talvoudusañ eo an eskemm menozioù hag an divizoù war an TU GVELLAN da GENDERC'HEL GANT AL STRIV..da gas an oberoù bepred war arrek, daoust da bep tra.

Labour vat a zo bet graet eta, war ar poent-se e NAONED gant bodadennoù izili ar Skol-Veur, dezho ur wir spered a EAGLEV hag a UNVANIDIGEZH, hag ar frouezh a vo tennet ac'hane a vo anat d'an holl, spi hon eus, dindan un nebet mizioù.

+

+ +

9 EZEL NEVEZ o doa graet o c'houlenn evit bezañ degemeret er Gorsedd, ar bloaz-mañ. Bez e oa anezho tud a-zoare: brezhonegerien akuit, gouest da sevenin ul labour a-bouzh war da-

ghepp ensay sevenadur Breizh. Hag evel-se e tle heppañ da  
izili SKOL VEUR ar VARZMED da vezañ-dre tonkadur - evel flammou  
beu buhez sporodol ar vro. Setu anv an izili nevez :

DROUIZED NEVEZ: Francoz TERS; kelenner; desket war meur a yezh  
skrivagner-

Yann PIETTE (Arzel Even) kelenner, desket war  
ar yezhoù, skrivagner

BARZHEZ- Brouf Jorj BERTHO (Gwennael ar Mor) kelenner  
Max AR FUR -skoazeller-neter.

DISKIBLEN- Noela OLIER gwreg A. al Louarn - mamm tiegeseh  
Christian GUIONVARC'H - barzhonegour - desket war  
ar yezhoù

Yann PLUNIER - studier - kaner - soner  
Odon a GOUASNON - gounidag-douar

BARZHEZ a ENOR - Itron de la Croix-Kergrist - kanerez

DROUIZ-dre ar pell-amzer ma oa ezel ar Gorsedd- E. COARER-  
KALONDAN -  
- skrivagner-

---

ROLL AN IZILI BET E GORSEDD NAONED- A. ALLAIN- G. BERTHOU-KERVERZHIQU  
J. CHOLEAU - E. COARER- P. CADIEUX- O. de COUASNON- MAX LE FUR,  
E. GALBRUN - J. LEGALL (Ab Sulio) - A. HEMLIN- Job KERGRIST, A. LAJAT  
P. LOISEL - A. LOUARN - J. LOYANT - Dr MENGUY - R. PRAUD - Y. PIETTE  
Dr ROUSSEAU- J. SANSEAU- B. de PARADES, Abad POISSON - J. BRAUD  
hag an It. - It. de la CROIX-KERGRIST

En em digarezet : A. BERANGER - V. de BELLAING - Ph. LE  
BESGUE, J. BIZIEN- Dr LE BRETON - E. BARZIC - G. BERTHO-  
H. CEVAER - E. CARRE - A. de DIEULEVEULT - Dr DUJARDIN -  
J. DARSEL- KERLANN - F. EVEN - W. H. GREGORY- Biela AR GALL-  
Dr AR GOFF - Ch. GUIONVARC'H- L. HERRIEU - J. ILIOU - TALDIR-JAF-  
FRENNOU - Col. JANNIN - N. OLIER- P. MOCAER - P. MONTJARRET  
Chalon MARY - Dr PERQUIS - Dom A. PRESSE - J. PENVEN - H. POIGNANT  
J. PLUNIER - L. ROPARS - V. de St PIERRE- Dr THOMAS - F. TERS-  
Dim. de VOLZ- D. AR VOYER - M. BARBIN - It. DELAMAIRE - Mrs. ASH-  
LEY-ROWE - M. DURTELL de St SAUVEUR - Dim. AR BARON. (Mamm gozh)

Mignoned d'ar SKOL VEUR ha n'int ket be tek vremañ-  
ezel anezhi, a oa deuet d'ar vodadegoù, en o souezh : Gab ar  
Moal hag an Itron- Ao; ha dim. AR ROUZ - Yann OLIER - It. KER-  
GRIST, Ao. de la CROIX- Dim. RIOU - Dim. MAROTTE. h.a.,

ha re all c'hoazh o doa skrivet evit kas e gourc'hemennoù  
evel : ROPARZ HEMON, Per DENES, C. AR GOAZIOU, E. TYMEN,  
C. CORNEVIN.. h.a. .

+  
+ +

A-hend-all, evit pezh a sell ouzh buhez ar Skol-Veur, ret eo menegin un dilez: hini an Dr. E. GUEGUEN (Yeotenn Vor) a oa ezel ar Pouellgor abaoe niver a vloavezhioù.

Dileuridi ar Skol-Veur e KEMBRE- E DOLGELLAU e oa dalc'het eus an 2 d'an 8 a viz eost tremenet, gouelioù an Eisteddfodd Broadel Kembre ha lidoù ar Gorsedd. Evel dileuridi eus Breizh e oa an Arouezh-Varzh : Eostig Sarzhaw hag an It. GALBRUN, droui-zez ar Pouellgor. An Drouiz Meur Taldir a oa bet pedet ivez, nemet n'eus ket getlet dont d'ar mare-se. (bet eo e Vro Gembre da c'houde, e-deroù miz gwengolo).

Un degemer kalonek a zo bet graet d'ar Vreizhiz gant o kindirvi. Kaer e oa al lidoù hag un engroez a dud o heul anezho.

Divizet a zo e vefe UNVANET, adaleg bremañ, lidoù ar Gorsedd evite da vezañ henvel e Breizh, e Kernev-Veur hag e Kembre.

GORSEDD DIGOR BREIZH 1950- Divizet a zo e vefe dalc'het da LUN VASK, e TREGASTELL (Bro Dreger) dre emglev etre ar Pouellgor ha pennoù ar barrez-se. Diskleriadurioù resis a vezo roet e-doug ar mizioù da zont.

Lec'hioù all e Breizh o doa kinniget degemer ar Gorsedd (KON LEON, AR BODGWENN)- M'ar d'eo bet dibabet Tregastell eo evit klotañ gant donidigezh niver a C'hembreiz a dle diskenn e Breizh evit ar gouelioù-se hag ober un dro er Vro, da c'houde. Tu a vo da gemer unan eus al lec'hioù all evit 1951. Ur skouer vat hon eus da gemer, poell ha skiant-prenañ, digant Kembreiz : adaleg ar bloaz-mañ, e-doug Gorsedd Dolgellau, e veze gwerzet roll dro vras an Eisteddfodd da vezañ e Kaerfili e 1950, ha diazezet dija gouelioù 1951 da vezañ e Llanrwst.

AN EMBANNADURIOU- An droidigezh e brezhoneg eus al levrig "Welsh Made Easy" a zo embannet : "AR C'HEMBRAEG HEP POAN" graet gant an Arouezh-Varzh Per LOZEL (gourc'hemennoù e genvreudeur en abeg d'al labour-se) -Goulennit ar skrid digantañ: 200 lur ha 30 lur evit ar mizoù-kas.

----- Un stock de rapports de la délégation galloise sur son voyage en Bretagne (1947) est disponible: Prix : 50 frs.+ 15 frs. frais poste -

----- Des exemplaires de luxe de "CHAL HA DICHAL" de R. AR MASSON- Edition bilingue : 500 frs- édition bretonne : 400 frs.

S'adresser également pour ces ouvrages à P.LOISEL- (voir adresse page suivante=).

----- Trugarekaat a reomp tud yaouank Kelc'h Brezon Naoned o doa aozet un abadennig plijus ha kempennet a-zoare, evit nozvez ar sadorn, e-doug bodadennoù ar Gorsedd e Naoned. Sonerien ha danserien ampart, e gwirionez, hag arouez don spered Breizh warno.

Evel kanerien : Job KERGRIST-nevez anvet drouiz- a zibabas kanaouennoù, e brezhoneg a blijas d'an holl.-Nos remerciements également à Madame de la Croix-Kergrist pour son aimable concours dans des chants très bien interprétés, en français.

----- Notre ami Philéas LE BESGUE, du Collège des Bardes des Gaules, vient de perdre son fils. Nous lui présentons nos condoléances bretonnes bien sincères.

----- E ti ar barzh yaouank E. AR BARZHIG, a zo nevez ganet ur plac'hig: Annaig-Mari-Mikael eo bet anvet. Gourc'hemennoù d'an tad ha bennoz an Aotrou Doue war ar Vreizhadez vihan ha war an tiegez a-bezh.

----- Les Bretons de Saïgon font paraître un petit bulletin mensuel accompagné d'une page d'actualités celtiques. Ils nous en ont fait parvenir quelques exemplaires que nous tenons à la disposition de ceux qui en désireront.

COTISATION- Elle demeure toujours, -jusqu'à nouvel avis - de 200 frs. par an. La plupart des membres l'on versée pour 1949 et certains mêmes nous ont envoyé des sommes plus élevées. Nous les en remercions sincèrement.

Les versements sont à faire soit à P. LOISEL, soit à Dom A. PRESSE- dont les adresses et numéros de comptes postaux ont été indiqués dans les précédentes circulaires du Gorsedd.

-----  
-o-

RAF ELONS que, pour tout ce qui concerne "ME A ZALC'HO"

---les abonnements, avis et communications s'adresser à :

André LATIMIER -  
24, Rue Edmond Nocard -  
SAINT-MAURICE (Seine)

---tous articles à publier - :à

Y. DELALANDE-KERLANN  
16, Rue du Colonel Fabien -  
QUINCY s/s SENART (S. & O.)

--- Evit al lizheroù hag an danevelloù e sell ouzh

buhez an E.K.B. : E. TYMEN -  
30, Rue de la Résistance-QUINCY s/s SENART

--- Pour la partie réservée au)

Collège des Bardes : P. LOISEL, 23, Rue Eug. Tessier  
NANTES (L.I.)

-o-o-o-o-o-o-